



Kemenadenn sindikadoù Diwan

Da heul an emvod-meur e oa bet kelaouet ar c'hoprider-adezed e vefe lakaet traoù e plas evit gwellaat an aergelc'h labour er sez. Prezidantez ar c'hevread Diwan, Anne-Sophie Brats he deus embannet e anv burev Diwan d'ar PSE d'ar 15 a viz Even e vefe an diskoulmoù-mañ:

- mezegezh al labour ha psikologourezh al labour
- un ambroug posupl gant ar Carsat
- diarbenn gwareziñ evit ur c'hoprader nemetken
- un emvod gant ar genrenerezh ha 2 zen eus ar burev evit lakaat ar gaoz war an diskoulmoù posupl
- krouiñ ur post renerezh kentañ derez Diwan

An dileuridi-adezed sindikel 'zo bet kelaouet d'ar 26 a viz Even e vefe eus un argerzhadur dic'hoprañ evit bep kenrener, ha kelaouet omp bet ivez e vo dic'hopret ur renerezh skol.

Ankeniet bras omp gant an divizoù-mañ. Gwasket e vez muioc'h mui an implijidi er sez hag en tiez-skol. Rankout a reomp lavarout en-dro o deus divizoù ar burev ul levezon war mont en dro hollek ar c'hevread hag ar riskl a zo distrujañ Diwan gant divizoù ken feuls e-keñver an implijidi. Degas a reont dizfi hag anken war ar c'hoprider-adezed hag a ra ul labour divent gant ar moaienoù dister o deus hag ar c'hondisionoù kinniget dezho. Arouezius eo e vefe kement a dud ehanet, ha nebeutoc'h-nebeutañ a dud er PSE ivez.

Degas a reomp da soñj d'an holl stad ar servijoù abaoe 4 bloaz :

- un implijader a zo aet war he leve hep bezañ erlec'hiet.
- tud ehanet evit pell nann erlec'hiet
- aet eo kuit 4 implijad-ez eus ar sez (diwar 16 implijad-ez)
- ez eus bet dic'hopret ur rener 3 bloaz 'zo, ha chomet omp mizioù hep rener.ez ebet a-raok ma vefe enfredet ur renerezh a zo chomet 1 bloaz nemetken evit echuiñ gant ur genrenerezh a vo a-benn nebeut dic'hopret....
- hep kontañ an ehanoù a zo bet abaoe un nebeut sizhunvezhioù a ziskouez skuizhder an implijidi-adezed.

DA BELEC'H EZ EOMP???

Goulenn a ra groñs ar sindikadoù e chomfe a-sav ar burev gant an divizoù feulz, diboell hag a-enep an dud a vicher.

Goulenn a ra groñs ar sindikadoù e vefe klevet ha selaouet goprider-adezed ar sez. Lakaet e oa bet evezh gant ar PSE e miz Genver e oa riskloù psiko-sokial er sez hag e tiez-skol 'zo, savet e oa bet goulennoù, ha respont sklaer ebet, war-bouez krouidigezh ur post renerezh kentañ derez a laka da grediñ e c'hellfe un den nemetken diskoulmañ ar c'hudennoù.

Goulenn a ra groñs ar sindikadoù e vefe kemeret divizoù evit stabilded ar servijoù ha dazont kevread Diwan.

Goulenn a ra groñs ar sindikadoù e vefe kaset ar preder war roll pep hini en ur gevredigezh ken bras.

Goulenn a ra groñs ar sindikadoù e vefe adkavet ur mont en-dro demokratel ha doujus ouzh pep hini (goprider ha tud a-youl vat)

Degas a ra soñj ivez ar sindikadoù o deus izili burev Diwan deverioù evel implijer (ar c'huzul merañ) a-fet yec'hed ha surentez war al lec'h labour. Aze ez eus mankoù grevus hervezomp dre ma vez muioc'h-muiañ a dud ehanet abalamour d'al labour. Ne c'hell ket ar goprider-adezed kenderc'hel da labourat e kondisionoù a-seurt-se.

Ar sindikadoù a lavar NANN evit un distro-skol hep renerezh e penn ar gevread !

Souten a reomp neuze goprider-adezed ar sez hag ar genrenerezh.

Souten a reomp rener.i.e. ar skolioù, skolarjoù ha liseoù o deus ezhomm tud a vicher evit skoazellañ anezho.

**Emgav er sez d'ar gwener 3 a viz Gouere adalek 12e30
ma c'hellit dont deuit niverus, seul niverusoc'h seul greñvoc'h !**



Communiqué des syndicats de DIWAN

À la suite de l'assemblée générale, les salarié·e·s avaient été informé·e·s que des choses seraient mises en place pour améliorer l'ambiance de travail au siège. La présidente de la fédération Diwan, Anne-Sophie Brats, a annoncé au nom du bureau de Diwan lors du CSE du 15 juin que ces solutions seraient :

- la médecine du travail et la psychologie du travail
- un accompagnement possible par la Carsat
- une mesure de protection pour une seule salariée
- une réunion avec la co-direction et 2 membres du bureau pour échanger sur les solutions possibles.
- la création d'un poste de direction du premier degré

Les délégué·e·s syndicaux ont été informé·e·s le 26 juin qu'une procédure de licenciement était en cours pour chaque co-directeur, et nous avons également été informé·e·s qu'une directrice d'école allait être licenciée.

Nous sommes très inquiet·e·s par ces décisions. La pression s'accroît de plus en plus sur les salarié·e·s du siège et des écoles. Nous devons rappeler que les décisions du bureau ont une influence sur le fonctionnement général de la fédération, et qu'il y a un réel risque de détruire Diwan avec des décisions aussi violentes envers les employé·e·s. Elles apportent de la défiance et de l'anxiété chez les salarié·e·s, qui abattent un travail immense avec les faibles moyens dont ils-elles disposent et les conditions qui leur sont proposées. Il est significatif qu'il y ait autant de personnes en arrêt, et de moins en moins de monde au CSE également.

Nous rappelons à tous·tes l'état des services depuis 4 ans :

- une employée est partie à la retraite sans être remplacée.
- des personnes en arrêt de longue durée ne sont pas remplacées.
- 4 employé·e·s ont quitté le siège (sur 16 employé·e·s).
- un directeur a été licencié il y a 3 ans, et nous sommes restés plusieurs mois sans directeur·rice avant qu'une directrice ne soit embauchée, laquelle n'est restée qu'un an, pour finir par une co-direction qui sera bientôt licenciée...
- sans compter les arrêts survenus depuis quelques semaines qui témoignent de l'épuisement des salarié·es.

OÙ ALLONS-NOUS ???

Les syndicats demandent fermement que le bureau cesse ces décisions violentes, insensées et qui insécurisent les professionnels.

Les syndicats demandent fermement que les salarié·e·s du siège soient entendu·e·s et écouté·e·s. Le CSE avait alerté en janvier sur les risques psycho-sociaux au siège et dans certaines écoles, nous avons posé des questions, et nous n'avons pas eu de réponses claires, mise à part la création du poste de direction du premier degré qui laisse à penser qu'une personne pourrait régler tous les problèmes.

Les syndicats demandent fermement que des décisions soient prises pour la stabilité des services et l'avenir de la fédération Diwan.

Les syndicats demandent fermement qu'une réflexion soit menée sur le rôle de chacun·e dans une association d'une telle ampleur.

Les syndicats demandent fermement que soit retrouvé un fonctionnement démocratique et respectueux de chacun·e au sein de la fédération (salarié·e·s et bénévoles).

Les syndicats rappellent également que les membres du conseil d'administration de Diwan ont des devoirs en tant qu'employeur en matière de santé et de sécurité sur le lieu de travail. Il y a là des manquements graves selon nous, car il y a de plus en plus de personnes en arrêt à cause du travail. Les salarié·e·s ne peuvent pas continuer dans de telles conditions.

Les syndicats disent NON à une rentrée scolaire sans direction à la tête de la fédération !

Nous soutenons donc les salarié·e·s du siège et les co-directeur·trice·s. Nous soutenons les directeur·rice·s des écoles, collèges et lycées qui ont besoin de professionnels pour les épauler.

Rendez-vous au siège le vendredi 3 juillet à partir de 12h30.

Si vous pouvez venir, venez nombreux.euses, plus nous serons nombreux.euses, plus nous serons forts !

Le mercredi 1er juillet 2026